


— 5 —

Vit lakad Otro Doue
Da ober d'imp trugare.

Dal ma zistroer
A wir galon outan
Raktal e kaver
Hep mar-ebed enan
Eun tad leun a garante
E kenver he vugale.

War hon pec'hejo
Mad eo gwelan dourek,
Demb er retrejo
Da skuilan daëro c'houek :
Demp da welc'hi aliez
Gante hon fallagriez.



AR BARADOZ.

78 C

Kan 40. Dom Herry.

Jezuz ! hag hen braz vo
Eur-vad an inco
A vezo gant Doue
Digemeret en E !

An amzer gavan ber,
Hag ar poanio dister
O sonjal de ha noz
En gloar ar Baradoz.

Pa zellan en envo
Hag entreuze ma bro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmik wen.

— 6 —

Pa vo tol ar maro ,
Neuze me gimiado
Ouz ar c'hig ankenius ,
Eneber da Jezuz.

Gant joa e c'hortoan
An tremen divean :
Hast am euz da welet
Jezuz ma gwir bried.

Raktal ha ma vezo
Torret ma chadeno ,
Me a zavo en er
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar
Evit monet d'ar c'hloar ;
Dreist an heol , ar stered
Me a vezo douget.

Pa vin uz d'an douar ,
Traouien leun a c'hlac'har ,
Me rei neuze eur zel
Ouz ma bro Breiz-Izel.

Neuze me lavaro :
Kenavo dit , ma bro ,
Kenavo da viken
Kenavo , peb anken.

Kenavo , dienez ,
Kenavo , peb enkreiz ,
Kenavo , trubuillo ,
Kenavo , pec'hejo.

Pelloc'h ne doujin ket
Ardo an drouk-speret :
Biken me n'em gollo
Goude tol ar maro.

A bep tu pa zellin ,
Kement tra a welin
A rai d'am daoulagad
Ha d'am c'halon oll vad.

— 7 —

Dorio ar Baradoz
Digoret d'am gortoz
Ar Zent ha Sentezet
Ouz ma digemeret.

Me vo digemeret
En palez an Drindet
En kreiz an enorio
Hag ar meulodio ;

Hag enon , evit mad ;
Welin Doue an Tad
Gant he Vap beniget
Hag ar Speret meulet.

Me a welo Jezuz ,
En eur c'hiz diduuz ,
O lakat war ma fen
Ar gaeran kurunen.

Ho korvo evuruz ,
A lavaro Jezuz ,
Oa tenzorio kuzet
En douar biniget.

Evel grouio roz gwen ,
Pe dorkado spern-gwen ,
En kornig eul liorz ,
E m'oc'h e kreiz ma forz.

Evit poanio dister ,
Evid ankenio ber ,
Me am bezo er c'hloar
Pouez mad ha muzul bar.

Goud'ar maro heb ken
E welo ar c'hristen
Petra dal en Envo
He oll vad-obero.

Kaer a vezo gwelet
Ar Werc'hez veniget ,
Gant daouzek stereden
A ra e c'huruñen.

— 8 —

Gwelet a rimp ouspen,
Gante peb a delen,
Ele hag Arc'hele
Oll o veuli Doue.

Hi gan da beñeil dro
Gwerzjo neve ato,
O rei meulodio
Da grouer an Envo.

Enon ni welo c'hoaz
Leun a c'hloar hag a c'hraz
Tud savet a bep lec'h,
Beleien ha menec'h.

Gwerc'hezad a bep noad
Sentezed a bep stad,
Grage, intanvezet
Gant Doue kurunet.

An oll Eleigo
War ho eskeligo
Ker mignon, ker ru-ben
A nijo dreist hon pen.

A c'hour-nijo dreist-an
Evel eun tol gwenan
War vleun en eur parkad,
Gante son ha c'houez vad.

Enon welimp ive,
Tanet a garante,
Hon tado, hon mamo,
Hon breudeur, tud hon bro.

O kaeran euruzdet,
Na mad eo da garet !
Te ro d'imp disc'hlaç'har
Kreiz poanio an douar.